



HAL
open science

Geriaoueg an dristez e kanennoù Bro-Gwened

Myriam Guillevic

► **To cite this version:**

Myriam Guillevic. Geriaoueg an dristez e kanennoù Bro-Gwened. Hor Yezh, 2020, 304, pp.3-10.
halshs-03660122

HAL Id: halshs-03660122

<https://shs.hal.science/halshs-03660122>

Submitted on 20 Jul 2022

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial 4.0 International License

Geriaoueg an dristez e kanennoù Bro-Gwened.

Myriam Guillevic
Docteure en littérature bretonne
CELTIC-BLM

Penaos e vez diskouezet an dristez e kanennoù Bro-Gwened ? Peseurt gerioù a vez implijet evit en ober ? Petra a lâr ar gerioù-se a fromoù ar Vretoned ? Furchet eo bet en ur c 'horpus a sonennoù gwenedek evit sevel al listennad gerioù da heul evit klas respont d'ar goulennoù-se.

I. Peseurt santimantoù a vez maget get ar Wenedourion pa vezont trist ?

E studial ar c'hanennoù savet gete e weler pegen pinvidik eo tachenn ar gerioù implijet evit komz ag an dristez.

1. Ar chagrin

Peogwir e vez kanet alies o chagrin bras get ar Wenediz e vez kavet paot-mat a c'herioù evit komz ag ar santimant-mañ. Iskisar tra, istor ar gerioù pa vez gouiet e vehe ar ger **chagrin** ur ger nevez a-walc'h e istor ar gerioù e galleg. Dont a rahe ag ar XVIvet kantved hepken ha savet ag ar ger turkeg *şagrı* a sinifi kroc'hen ul loen, setu perak e vez lâret e galleg « peau de chagrin ». Roud ebet ag ar chagrin er C'hatolikon. Daet eo ar ger-mañ diwezhat e yezh Breizh ag an turkeg d'ar galleg hag ag ar galleg d'ar brezhoneg ha daet da vout implijet alies e-barzh ar c'hanennoù. Setu, neuze, ar bugulezed, ar velinerion pe ar soudarded vreton é kaout bremañ **chagrin bras**.

En eutru juge oé a lari

D'en eutru geôleyir :

-« **Arsa vou ret ou dimiein**

Ma n'ou devou kein a chagrein. »

“Merh er geôleyir a Lyon” dastumet get GILLIOUARD, kanet get Marie Philippe, Kergen an 26-XI-1915.¹

Neoazh, p'o doa kroget ar Vretoned da oueliñ kalz e-raok ar XVIvet kantved, o doa a dra sur implijet gerioù arall evit komz ag ar pezh o lakae da skuilhiñ daeroù.

2. An dristez

¹ Dielloù Departamant ar Morbihan

Setu ur ger a vez kavet er C'hatolikon, koshoc'h neuze ag ar ger chagrin. Dont a ra ag al latin izel a C'hallia *tristicia, tristitia e latin klasel*.

Mod-se e krog da skouer *gwerzenn an dizarterion* dastumet get Jean-Mathurin CADIC² :

Ne huélamb kin bamdé meit ankin ha tristé

Kavet e vez ingal er c'hanennoù, daoust ma ne vez ket ken alies ag ar ger chagrin. Ar merc'hed o deus **o c'halon en dristez** abalamour d'o dousig difeal pe a zo **lakaet en dristez** pand int fall dimezet. Lan a dristez eo an dud pe gwazhoc'h c'hoazh pant int lakaet pe 'ploñjet» **en ur mor a dristez** é kimiadiñ d'ur beleg karet pe d'ur roue forbannet :

Éz-é de hanaùet é peh mor a dristé

En dès groeit d'emb kouéhel en dud a falanté,

Trebil, mizér, glahar', ankin, affliction,

Kement-sé e gavér bremen é peb kanton

Aviz d'an dud a Vourieg, dastumet get Augustin GUILLEVIC³

3. Ar glac'har

Tudennoù ar c'hanennoù o deus kalz muioc'h a **c'hlaç'har** evit m'o deus a dristez hag a chagrin. Kozh a-walc'h ar ger ivez daoust ma n'er gaver ket er C'hatolikon e vez implijet e c'hrenn-vrezhoneg ha kavet neuze e testennoù ar XVvet kantved. Emile Ernault a doste ar ger *glac'har* d'ar gouezeleg a vro-Iwerzhon *galar* a sinifi hiniv kleñved ha d'ar c'hembraeg *galar* ivez en deus an hevelep ster ag ar brezhoneg *glac'har*.

Glac'har a garantez o deus an dud yaouank ha **na pezh ur glac'har** da vout rediet da zimeziñ get un evour. Gellout a reont **bout e glac'har** 'el ar plac'h pa za he dousig da vout beleg pe **oueliñ get glac'har** é c'hortoz o c'harantez ha na zistro ket d'ar servij.

Er plahig Marion, gued ankin ha glahar

Hag én dé hag én noz ne hra nameid ouilar.

"Ar plac'hig Marion", dastumet get Jean-Mathurin CADIC

Glac'har o deus ivez an dud **d'unan bennak**, pa vehe da Soudard ar Fur pe da M'ami Mandart pe **d'un dra bennak** 'el d'o yaouankiz. Hag amañ e tosta ster ar ger d'ar ger *hiraezh* kentoc'h evit ar ger *tristez*.

4. Ar velkoni

² gwelet al levrlennadur berr

³ id.

Lan a velkoni e c'hell bout ivez kalon ar Vretoned. Ha setu ur ger a gaver ivez er C'hatolikon. A orin gresian eo pa za ag ar gerioù *mélas* (du) ha *kholé* (bestl), tremenet e latin *melancholia*. Ur ger a za a dachenn ar vedisinerezh da gentañ e-raok bout bet implijet er vuhez foran ha kavet e vez kalz muioc'h er sonennoù savet get tud desket (beleien d'an aliesañ) evit er re savet get tud ar « bobl ».

Mes ne vira ket ar sonennoù hengounel da welet é kreskiñ e jardrin an dud yaouank **louzaouenn ar velkoni** e-tal hani ar jalouzi :

**Tri sorte plant zou plant' in hei,
Levan, soursei ha jâlouzei.**

**Levan, soursei ha jâlouzei
Ha lezeùen er velcoñnei.**

Dastumet get GILLIOUARD, kanet get Jean-Marie Nézet an 30-XI-1913⁴

5. Poan (poen)

Sterioù lies en deus ar ger *poan* ha ret eo dispartiiñ ar sterioù-se. Ne vez ket ar boan-benn get ar Wenedourion, droug-penn o devez. Ne vez ket implijet ar ger poan neuze evit ar pezh a denn doc'h ar c'hleñvedoù.

Neoazh, n'eo ket evit an abeg-se ne vez ket kavet ster diaezamant ar c'horf get ar ger *poan* mes implijet e vez kentoc'h liammet get al labour. Poan en deus al labourer-douar goude un devezh hir a labour, poanioù o deus ar vartoloded àr ar mor bras embarket.

Poan a sinifi ivez ar strivoù a raer evit tizhout ur pal hag e karantez e vez alies kollet ar boan pa vez nac'het reiñ ar verc'h get an tad da skouer.

Laoskomp a gostez ar sterioù-se evit degemer kentoc'h ar ster a dristez en deus ivez ar ger *poan*. **Poan en o c'halon** pe **poan d'o c'halon o deus** an dud yaouank dilezet, ha pa n'eo ket en o c'halon emañ lec'hiet ar boan emañ **en o spered**. Traoù zo ivez **a ra poan d'o c'halon** 'el kan an durzhunell p'he deus kollet he far pe difealded un dousig treitour :

O non pas sur dénig ieuank, nen des ket a bardon

Er péh e huél men deùlagad e hra poén d'em halon

Ar vugulez d'ar Lann, dastumet get Kanerion Bro-Boio ha kanet get Marie-Lyne Mandart e 2005.

Dont a ra ar ger *poan* ag ar ger latin *poena*. Kavet e vez ar ger *poen* e kembraeg ivez. Da dostaat eo d'ar ger galleg *peine*.

6. Gloaz (gloez)

War skeul an dristez eo ar *c'hloaz* un tamm kreñvoc'h peogwir e kas ur soñj a c'houzañv oc'hpenn ar fed da vout trist.

⁴ Dielloù departamant ar Morbihan

Kar eo d'ar ger *gloes* e kembraek mes an etimologiezh ne seblant ket sklaer. Get Joseph Loth e vehe liammet get ar ger *glas*, get Louis Le Pelletier e vehe kentoc'h é tonet ag ar ger *glaou*.

Gloaz a gavo ar merc'hed dimezet get un evour pe kollet gete unan karet. **E-kreiz ar gloaz** e vint. Ha pa vezo re zon an dristez e **tarzho o c'halon get ar gloaz**.

Me zad, em es mé reskondet, n'em bou ket un ivour

Rak ne gavein bamdé geton meit gloéz ha dizinour.

Glahar Marion, savet get Stevan Kerhoret⁵

7. Chif

Ar chif en e galon e ya an den yaouank da gimiadiñ doc'h e zous Marion. Gellout a ra bout **ar chif hep somm** zoken pand eo bras-tre ar chagrin. Mes ne vez ket kavet alies an anv *chifer* c'hanennoù. Kavet e vez kentoc'h ar verb chifiñ.

Mès kent kuitat é has get chif én é galon

De laret kenavo d'é zousig Marion:

“Taüet, men dousig kaer, taüet, ne chifet ket

Nag é hehen mé pel, doh é talhein perpet.

Er plahig Marion, dastumet get Jean-Mathurin CADIC⁶

Liammet e c'hellehe bout get ar ger galleg «chiffe» mes diasur eo etimologiezh ar ger-mañ a zahe, hervez lod hag hep ma vehe sur penn-dar-benn ag ar ger arabek شف a sinifi “danvez skañv”. Lod arall a liamm kentoc'h ar ger *chiffe* get ar ger wallonek *cafu*, da geñveriañ get ar ger skosek *cauf*. Hag erfin e vez kavet ivez ar varseadenn ag ur ger distreset ag ar ger *chiffre* a sinifie “tra didalvez”.

8. Kalon diaes

Amañ n'eo ket ur ger mes un dro-lavar a vez implijet. **Kalon diaes o deus** ar baotred pa glevont eo dimezet o mestrez pe ar merc'hed yaouank pand int traiset. Ha pa n'eo ket diaes e c'hell bout **gwasket o c'halon**, ur galon hag a zo **paour** a-wezhoù.

Un tammeg un tammeg em es kalon diaes

Kleuet em es laret : vad e ra dein hi guelet

Kleuet em es laret 'ma diméet me mestréz

Dastumet get Kanerion Bro-Boio ha kanet get Casimir Le Tarnec e 1999.

Gellout a rahemp komz ag an anken pe an nec'hamant ivez mes tenniñ a reont muioc'h a dachenn an aon evit a dachenn an dristez.

⁵ Dihunamb, Meurzh 1907, niverenn 21, pp. 343-344.

⁶ Embannet e Revue de Bretagne et de Vendée et d'Anjou, Février 1889

II. Penaos e vez diskouezet an dristez get ar Wenedourion ?

1. Goueliñ (gouilein) ha skuilhiñ daeroù

a. Goueliñ

Goueliñ a zo ar pezh a vez graet d'an aliesañ. Stummoù ar verb a vez kavet a zo liesseurt : get ar « g » pe hep : **goueliñ** pe **oueliñ**, **gouelar** pe **ouelar**, **gouelon**. Pegen alies e vez goulennet d'ur plac'h perak emañ-hi é oueliñ! Ha gwir eo e ouel alies ar merc'hed yaouank ha abegoù o deus evit hen ober pand int rediet da zimeziñ pe pand int dilezet get o c'harantez. Ar baotred a ouel ivez neoazh : ar soudard prizonet, ar beleg pa gimiad doc'h e barrezianiz pe pa intera ur plac'h yaouank drouklazhet,...

Kommañs e ra 'n iliz glubein, ô !

Kommañs e ra 'n iliz glubein,

Kommañs e ra 'n iliz glubein,

Latira o roulanla

Get plac'h an éred é ouilein

Latiroula la leno.

Dastumet get Polig Montjarret, kanet get Julien le Ménah a Gaodan e miz Ebrel 1952⁷

Ken bras e c'hell bout ar chagrin eo **diaes miret a oueliñ** ha gouelet e vez **hep arsav, noz ha deiz, deiz ha noz**. Gouelet e vez **ar penn soubet** pe **pleget**. Lod a gav gwelloc'h **goueliñ o-unan** mes en doare-gourc'hemenn e vez implijet ar verb ivez pa vez goulennet get ar Vretoned goueliñ holl-asambles a-wezhoù pa gollont ur roue, un haroz pe un den santel da skouer.

Gouelet e vez d'unan bennak pe **d'un dra bennak** 'el d'ar yaouankiz kollet da skouer.

Mes lies eo ar gwezhioù 'lec'h ma vez implijet ar verb-mañ er stumm-nac'h. « **Tavit, chikit, ne ouelit ket** » a zo ur frazenn a zo ken boutin er sonennoù hengounel eo daet da vout ur c'hliche e Bro-Gwened mes e lec'hioù arall e Breizh ivez. Ha pa ne vez ket goulennet get ar paourkaezh plac'h glac'haret tevel e vez goulennet geti **arsav a oueliñ**.

Taùit, taùit, ta merhed

Taùit, taùit ta, ne ouilit ket

Hag el ma demb ni d'en armé

Rah 'r baotred n'en dint ket

Jandarmed Sant-Yehann, dastumet get Kanerion Bro-Boio ha kanet get Henriette Bernard e 1992.

b. An daeroù (an dareù)

⁷ Ar soner, niverenn189, Genver-C'hwevrer 1971

Ma ta an daeroù a-greiz ar galon e taont ivez a-bell en istor ar gerioù pa vez kavet ar ger **daer** e wrizienn en *dákru* indo-europeane. Ha kar eo neuze d'an *dagrau* kembraek, d'an *dakrya* c'hresianek, d'al *lacrima* latin, d'an *tear* saoznek, d'an *Träne* alamanek...

Ha kavet e vezont ingal é **skuilhiñ**, é **redék** pe raloc'h e **kouezhiñ** a zaoulagad an dud betek **glubiñ** o dilhad a-wezhoù pe **kejiñ get ar mor** zoken.

Paotred pe merc'hed a skuilh daeroù ha d'an aliesañ int tud yaouank glac'haret get ur chagrin a garantez. Pe nac'het eo bet an eured get ar gerent, pe traiset int bet get o dousig. A-wezhoù ivez e red an daeroù a-gaoz da varv o c'harantez.

Achiùet-hwi me mab

Er péh hues komañset

Laosket er merhed a-gosté

Ha kerhet de voud béleg.

'N overenn ketan n'doé laret

Oe e parrez Pleuigner

Hag en dareù 'n é zaoulagad

E gouéhé àr en aoter

Er lez ketañ, dastumet get Kanerion Bro-Boio ha kanet get Guy Le Corre e 1997.

Ar merc'hed a skuilh daeroù kar int rediet da zimeziñ pe pand int fall dimezet. An daeroù-se a red ivez abalamour d'ar vezh pe d'ar c'heuz pa vez kollet o inour.

Daeroù ar baotred a vez gwelet kentoc'h pand eo arru ar prantad da gimidiñ doc'h o zud pe doc'h o dousig, pe doc'h o fobl pand int ur roue pe ur beleg forbannet.

Ur wezh m'emaint skuilhet emañ **torchet** an daeroù pe aliesoc'h **sec'het**.

Eüruzamant n'eo ket bepred an daeroù un arouez a dristez ha gallout a reont bout skuilhet abalamour d'ar joa d'en em gavet en-dro goude ur prantad hir a zisparti.

Ur wezh an amzer ne vez ket komzet ag an daeroù mes ag an **dour** a red a fas an dud chagrinet mes ar skeudenn-se ne vez ket implijet alies. N'em eus kavet metaforenn all erbet evit komz ag an daeroù.

2. Huanadiñ (huanadein)

Huanadiñ a ra ar Vretoned a-c'houde pell pa vez kavet ar get *huanat* en henvrezhoneg dija. Meneget eo er C'hatolikon ivez ha gellout a ra bout liammet ar ger-mañ get ar gerioù *uchenaid* en kembraeg hag *osnadh* en iwerzhoneg. Stummet e vehe get ar gerioù *huel* hag *anä* (analiñ).

Pand eo don ar glac'har e huanad an dud noz ha deiz. **Ar galon** ivez a **c'hell huanadiñ**. **Huanadet e vez àr-lerc'h un dra bennak** evel al liberte mes ar garantez eo an dra a ra d'an dud **huanadiñ** d'an aliesañ.

En hani e garan e hra dein huañnadein

Huañnadein noz ha dé, dé ha noz hirvoudein ;

Raksé chonjet em es eit disammein m'inéan

Seùel ur soñnennig d'en hani e garan

En hani e garan, savet get Jean-Baptiste Olierou⁸

Pa ne vez ket huanadet e vez **laosket huanadoù**. Kavet e vez daou stumm hag an anv-mañ : ur stumm gourel : *huanad* hag unan benel : *huanadenn*. Ar huanadoù a c'hell bout poanius.

3, Hirvoudiñ (hirvoudein)

Hirvoud zo ur ger savet ag ar gerioù *hir* ha *boud*. Kavet e vez ar verb *hirvoudaff* er C'hatolikon hag an anv *hirvoud* e skridoù ar c'hrennvrezhoneg.

Hirvoudiñ pe **hirvoudal** a vez graet **d'unan bennak** evel ar plac'h yaouank é hirvoudiñ d'an hani a gar. Mes ar merc'hed a c'hell ivez **gober d'ar** baotred yaouank **hirvoudiñ**.

Hirvoudus eo a-wezhoù kan an evned pe stad unan bennak.

Ban !... Bin !...

Kleuein e hrer en Inéanweu

E hirvoudal barh en henteu ;

Krechenion hou zikouret

Hai hou supli, hou chèleuet,

Get er hlehér laret éhué

Ur bedennik eit hai de Zoué

Ban !... Bin !...

Gouel en Inéanweu, savet get Loeiz Herrieu⁹

En ur bourmen er sonennoù e vez kavet soñjoù hirvoudus ur bobl a vag he zristez en istorioù karantez melkonius, e kimiadoù poanius ha ne glask ket kuzhat he gloaz. Pa dreuz ar Vretoned mareoù a dristez hag a chagrin chifus e tiskouzhont o chagrin é skuilhiñ daeroù stank hag é sevel kanennoù. Get ma pado ar youl da sevel sonennoù ma pad an amzerioù glac'harus.

Levrlennadur berr

GUILLEVIC A. et CADIC Jean-Mathurin, *Chants et airs traditionnels du pays vannetais*, Vannes, Dastum Bro Ereg : Archives départementales du Morbihan, 2008.

DU RUSQUEC Henri, *Dictionnaire pratique et étymologique du dialecte de Léon*, 1895.

⁸ Bleuniou Breiz-Izel, Annales de Bretagne, Tome 19, numéro 1, 1903. pp. 29-49

⁹ La Croix du Morbihan, 3 novembre 1901, p. 2

ERNAULT Emile, *Le Mystère de Sainte-Barbe, monuments de la langue bretonne*, Nantes, Société des bibliophiles bretons et de l'histoire de Bretagne, 1887.

HENRY Victor, *Lexique étymologique des termes les plus usuels du breton moderne*, PLIHON J. et HERVE L., Rennes, 1900.

LE PELLETIER Louis, *Dictionnaire de la langue bretonne*, 1752.

MENARD Martial et LE BIHAN Hervé, *Devri*, [<http://devri.bzh/>].

MONJARRET Polig, *Kanaouennoù. Tome 3 Tome 3*, Pontivy, Dastum Bro-Ereg : Bodadeg ar sonerion : Mignoned Polig Monjarret, 2013.

OFIS PUBLIK AR BREZHONEG, *Meurgof*, [<http://meurgorf.brezhoneg.bzh/>].

VAN WINDEKENS A. J., « Encore Le Terme 'Larme' En Indo-Européen. », *Zeitschrift Für Vergleichende Sprachforschung*, vol. 90, n° 1/2, 1976, coll. « JSTOR », p. 12-17.